

# REPROCH D'ANN TADO AR D'AR MAMMO

**Voar sujet eun nebeut a surveillanç pehini ho deus enn andret ho bugale.**

*Voar don : Disquenomp holl a speret enn Ifern da voelet*

Tado ha mammo kristen, tosteet da glevet,  
Ar guentel meurbet touchant, a meuz bet composit,  
Voar sujet ho pugale couls vel var ho sujet,  
Rac eun tam braz ha abec a meus ennoc'h cavet.

Savet ho heus dizourci bugale vicius,  
A breman ezoc'h gant-he sivoas dac'h malhurus,  
Mar carjac'h bean sentet ouz ho confessoriet,  
Na voac'h quet bars er guiz-ze breman gant-he tretet.

Nellet quet ho c'hommandi a c'hoant dac'h d'enn ober,  
Losquet ho c'heus ar renjen gant-hé voar ho malheur,  
Breman gant eur zon guer se c'hui a renko dansall,  
A lezel an dud yaouanq, da donet d'ho tammall.

A ne quet eur vez goelet ann tado ar mammo,  
'Vit plegan d'ho pugale renq serrin ho gueno,  
Enn lec'h quemer eur galquen deuz a gorn ar c'heuneut  
Evit disquin dè squient, eur c'hais pe eun nebeut.

O tra eston hac estranch, o tra an horruplan,  
Golet ar re goz bouffon d'ho bugale breman,  
Nemert ar c'hoz vabouzec, na rer quen deus an tad  
Gand bugale elevet gand tud a doctrin vad.

Sellet-ingt barz er parco bemde ous nem gannan,  
Quent eo crog tud ar c'hontre gand eur vez da ruyan,  
O clévet ar chicannou e ve bemde entre-ze,  
Deja war crog da grial, hu ar vro so warné.

Amman ho heuz goufeet, tado ha c'houi mammo,  
Hag-é zo calz ha c'hevier, staguet ouz ma c'homzo,  
Rag ma fell dac'h commandin, eo c'houi ve commandet.  
Retornet ta enn bugel, breman c'hoaz ha zeatet.

Ho kir a glasquet dere'hel mes inutil eo dac'h  
Biquen ar majorite na vo lezet guenac'h,  
Ho mab-henan a renquo commandin ho menaj  
Roet ta eun dorn dean pe in rei ho tomaj.

C'hoas mar geo interesset 'vel meo possubl a ve,  
A c'hellet gand confianç quemer en annan se ;  
Mæs divoallet mar queret a nele visso fall,  
Pe voelfet ar rod prestec ho trein voar eun tu-all.

Commandin ar vugale breman a zo dies,  
Rac abret e quemeront eun ton meurbet nies,  
Divoar-ben eun disteran comz a adresset dè  
A leqefet mili maliç a mill drouc en enn-hé.

Ed breman da vutunad potr coz da gorn eun tan,  
Eun tammeç displijadur wit gouir ganac'h a van,  
Mæs bet consolasion eun devez a arrio  
C'houi a vo recompanset deus tout ho oll boangno.

Ho mab ma na gar divoal coulz vel ho merc'h,  
A voelo eur goel fortun ho redec voar he lerc'h,  
Bicoas na neus bet bonheur nep na gar quet he dad,  
Na birviquen na neso mar bet goët justic vad,

Tostaet ta bugale da glevet ma c'hentel,  
A divoallet na deufac'h pelloc'h d'ober brezet,  
Da nep a neus quemeret calz a boan d'ho sevel  
Bars eun noad a yaouanquis deus eun noad a vugel.

Ped goec'h ha neus-quet yunet ho tado ho mammo,  
Ho c'hoangno hac ho leigno a memes ho mergno,  
Wit soulajin ho naon, ho ma sonj-fac'h enn ze !  
Ouz ho tud enn ho c'hosni a guemerjac'h true.

Na ret quet a scouarn vouzar breman ta d'am c'homzo  
Mar ho c'heus c'hoant d'exantin ar brassa malheurio,  
A zo bet a na vezo birviquen voar ar bed ;  
Allo eta ma breudeur chang a gondou eo red.

Na vet quet ive re yen c'hui ouz ho pugale  
Goufeet, ingt bet roet dac'h espres gant Doue,  
'Vit multiplian eur raç deuz he zervicherien,  
Ne reign jammes ho bonheur hed suivan he lezen.

Tachet ta da dol eves, breman voar ho c'hondou,  
A groet ma guerzongt bepret enn hent ar vertu,  
Mar manquet da guement-se a refot ho malheur,  
Clesquet eta mar queret breman ho kuir bonheur.

Chetu aze ma brois ebars eun ber gomzo,  
Recitet d'ac'h eur gental gand eun den hac a zo  
He hano Yan Ar MINOUS, mab da Vari Vorvoan,  
A che m'enn Pleuveur-C'hauder enn placen Sant-Drian.

# ACT HA RECONNAISSANÇ

Groet enn honor da Vari, deuz tout ann oll Victorio a neus goueet Napoleon,  
a boez ma man voar ann Tron.

Var dou : *Santez Mari mamm Doue, he pep amzer Gwerc'hes.*

Honor ha gloar da Vari, protectourez ar Franç.  
Azistañ Napoléon, he c'hloar bag he buissañ  
Azistañ hon zoudardet, azistañ hon cheffo,  
Azistañ ar verdidu hac hon batimancho,  
Pa voa quistion dimp-ni enn bombard ar Russi,  
Da guemer Sebastopol a ret-jomp da Vari,  
Ni en treomp francichen eun enor ar brassan,  
A ze zo caus ma guersomp bepret enn penn quantan.  
Pa neo bet c'hoas quistion da zouten ar Pab,  
Gand eur zicour a Vari hac a Jesus he mab,  
On deuz bet groet eur voyen d'en derc'hel en e blaç,  
Rentomp eta da Vari mill action a c'hrac.  
Neuze pa neo commancet brezel an Itali,  
A c'homp bet eun voueslet adare da Vari,  
Pihini nemert hon zouten en peb momet na ra,  
Goelet hon deus quement-ze ouspen kant goech deja.  
Enn em ober pemp devoes on deus bet goneet,  
Ter gombat hac eur vatail a neus digoret,  
An or vras ha Vilan, capital Lombardi,  
N'hon deus quet gret quement-ze hep azistañ Mari.  
Quent antren bars er gær-se on deus bet eur vatail  
Enn lec'h ma neus eclatet eun tan hac eun mindrail  
Evit gloar ar francijen gouir yugale Mari,  
C'hanvoet liberatourien bro gær an Itali.  
Enn eur istant ar c'hélo a so casset da Rom,  
Da Durin, ha da Baris, quent-quent eun *Te-Deum*  
Enn on ilizo christen dre oll zo canet,  
Wit rentan gloar da Vari ha d'he Mab Binniguet.  
Goude ar beden quen caër groët deus a greis calon,  
Wit renta gloar da Vari hon mamm hac on Itron,

A heo bet ét on monarq suivet deus he drouplou,  
Da blaçan palm eur victoar bars enn Solferino.  
Goude tremen Marignan, a dont d'he c'honquerin,  
Dorrejo Solferino, a tachomp o diguerrin,  
Euo enn pad c'hoezec-heur zoutennet gant Mari,  
A rentchomp tout he droejo neuze d'an Itali.  
O gær vras deus a Vilan, chetu te delivret,  
Gant eur zicour a Vari deus d'oll ennemiet,  
Rent dezi breman graço a laqua da fianç  
Enn peb amzer enn en'hi evêl ma ra ar Franç.  
Franç, Milan, mar geo herrie bars er bet quen doujet,  
Eo eur gir ebquen a Vari ac a neus hi protejet.  
Eur gir ebquen a Vari, prononcet gant respet  
A zo capab da spontan ar brassan geantet.  
O preuen miraculus deus a c'hraço Mari,  
Chetu c'hui n'em discoeet d'imp bars en Itali,  
C'hoas a gresquo on fianç o Mari enn ennoc'h  
Goude quement a c'hraço obtenet tout dreizoc'h.  
Terminomp ma mignonet eun act a veulodi  
Groët ewit reconnaissañ eun enor da Vari,  
A pedomp-hi a galon da gât soing ac'hanomp,  
Pa vo ouz on azistan james na berissomp.  
Chetu aze ma brois canet enn ho presañ,  
Eun act caër a velodi hac a reconnaissañ,  
Groët enn honor da Vari gant eur servijer deï,  
Pedet Doue ewit'an d'ar baradoz ma hei.  
Me ive, Yann ar MINOUS, a bedo ewidoc'h  
Pa mo bet eur faculte d'imitan ac'hanoc'h,  
C'hui pere oll a galon enn n'em ro da Vari,  
Hac ha ra deus he graço uzach mad, hac impli.

(Propriété.)